



KEIT ALL ZO

Diskenn a reas gant skalieroù al leti, d'an trivet estaj betek an traoñ. Goloet gant voulouz ruz e oa ar pazinier, ur varrenn alaouret evit derc'hel a-ratre ar gwiad. Mouget e oa trouz e bazioù. War pondalez an estaj kentañ e tremenas ur strolladig maouezed gwisket cheuc'h ; o saludiñ a reas en ur zidogañ.

E traoñ, er sal-degemer, ez eas diouzhtu d'an daol-gont.

- Raymond, ne chomin ket da goaniañ amañ fenoz. E Kêr e vin.

- Mat-tre, Aotrou. Galvet 'm eus un taksi evel m'ho poa goulennet diganin. Amañ e vo a-benn pemp munut.

- Mersi Raymond. Noz vat !

Un den kran, e vlev gwenn, a zeuas d'e gaout.

- O ! Charles ! Ho klask a raen abaoe un abadenn. Petra a lartec'h eus ur *gin* er bar ?

- Ma Doue, Edmond, n'hallan ket fenoz. Un emgav. Diwezhat on c'hoazh. Ur wech all. Ma digarezit Edmond.

Mont a reas er maez dre an nor-tro. Noziñ a rae. Fresk e oa an amzer, hep glav avat. Prennañ a reas e vantell ha fichañ e dog. Ur voest-sigaretennoù arc'hantet a dennas eus godell dindan e vantell. Lopata a reas penn ur sigaretenn war ar voest. Dont a reas neuze Jean, ar porzhier, gant e zirenn.

- Setu ho taksi o tont, Aotrou Charles. Ra vo plijus hoc'h abardaevezh !

- En gortoz on e vo. Mersi Jean.

Hag e tichakodas ur bilhed evit ar paotr. Mont a reas e-barzh ar sitroen.

- Da belec'h e tlean ho pleniañ, Aotrou ?

- 16 straed ar Moneiz, mar plij.

- Mat-tre, Aotrou.

Monedone ar c'hirri a oa stank c'hoazh d'an eur-mañ. Digor a reas ar pod-ludu hag en em lakaas en e aez war azezenn vlot an DS 19.

* * *

N'oa ket evit miret da soñjal er gejadenn gant Pierre dec'h d'an noz. Ur sapre degouezh a voe ! Goude muioc'h a dregont vloaz hep an disterañ a geloù, setu Pierre dirakañ a-greiz-tout pa oa o kuitaat ar bank. Pierre e oa en doa anavet anezhañ ar c'hentañ. Eñ en doa bet poan evit en ober. Pierre, ur c'hamarad kozh pa oant o-daou er memes klas termen el lise.

- Gast, n'eomp ket war yaouankaat, eme Pierre, met anavet 'm eus ac'hanout diouzhtu. Cheñch 'peus ket graet, Charles, war a welan.

- Ha te, kresket 'peus c'hoazh ! Bras-tre e oa Pierre evit gwir.

Hag int da c'hoarzhin a-greiz-kalon.

- Selaou Charles, echu eo ma devezh-labour, deus 'ta da bakañ ur banne en ul lec'h bennaket.

- Ma, kontant e vefen, met n'hallan ket siwazh. Gortozet on gant ma c'henseurted eus ar bank evit koaniañ asambles fenoz. Amañ emañ evit ur sizhunvezhiad a labour diwar-benn ar c'hudennoù

bank, te oar, ur seurt kollok gant meur a vank pedet.

- Ya, kompren a ran. Ma, lakaomp warc'hoazh d'an noz ? Petra a soñjez ?

- Ee, gortoz, ya, perak ne vefe ket ?

- Dal, setu ma c'hartenn gant ma niverenn pellgomz. Ro din da hini.

Eskemmañ a rejont o c'hartenn.

- Biskoazh ! Doktor out ! N'eo ket gwir !

- Ya, mezeg on, a respontas Pierre. Ur goumoulenn a deñvalaas e zremm a-daol-krenn. Kontañ a rin dit an traoù warc'hoazh. Boñ, mall zo warnout, me gred. Lakaomp warc'hoazh da seizh eur noz, en davarn aze, en tu all d'ar vali. Mat eo dit ?

- Mat eo din Pierre. Dal, kartenn al leti a lojan ennañ, e kenkaz.

- Hama, ken arc'hoazh eta Charles ! Hag eñ kuit.

Souezhet e oa chomet ur mareig goude ma oa aet kuit Pierre. Souezhet gant ar gejadenn met ivez gant kemm trumm doareoù Pierre. Mont a reas d'e otel, lakaet diaes.

* * *

Lakaat a reas gwerenn ar c'harr da ziskenn gant an dornikell. O hedañ ar stêr Wilun e oant. Plijus e oa dezhañ ruflañ c'hwezh Kêr. Da bep Kêr he c'hwezh.

Pellgomzet en doa Pierre d'an otel evit reiñ goût dezhañ e oa cheñchet lec'h an emgav hag a oa duhont a-benn ar fin, e ti Pierre ; ne verne da Charles, n'en doa netra all d'ober fenoz. Anaoudegezh a rafe gant gwreg Pierre moarvat.

Ha just a-walc'h, diwar-benn e wreg ! Soñjoù du a leunias e spered a-greiz-holl. Nicole a oa e vuiañ-karet pa oa el lise. Mignonez Pierre e oa bet Nicole abaoe an eilvet klas. Met, setu, deuet e oa da vout dousig Charles e term, ne ouie ket mui hemañ na perak na penaos e oa c'hoarvezet. Ur gwall daol a oa bet evit e zarempredoù gant Pierre. Ne oa ket bet mui evel a-raok. Yenoc'h e oa bet emzalc'h Pierre en e geñver, ar pezh a gomprens mat Charles bremañ. Ha neoazh, e fin ar bloavezhskol en em zaremprede ingal ur sort ; gwir eo, peurliesañ gant ar re all ; ral a wech o daou o-unan.

- Gast ! Emichañs en deus ankouaet an istor kozh-se, eme Charles d'e chupenn, e-mod all e vo diaes an abadenn.

Kas a reas kuit ar soñjoù-se diwar e spered. Klask a reas kemer an traoù dre ar penn mat. Forzh penaos e oa erruet an taksi e penn e bal.

E korn ur c'hroazhent e oa ar savadur bras, e solenn graet gant mein benerezh. Sellet a reas ouzh e lein, pevar estaj uheloc'h, pep hini anezho gant pondalezioù-diavaez. Lojeizoù evit tud a-beadra, douetañs ebet. Digeriñ a reas an nor bonner. E-barzh e logell e oa ar porzhier. E anv a roas dezhañ.

- Ho kortoz emañ an aotrou Pierre. Pevarvet estaj. Emaon o vont da c'hervel ar bignerez.

Ur wech homañ diskennet e tigoras ar gael-houarn.

- Ma faot d'an aotrou mont e-barzh eme ar porzhier, daoubleget. Un abardaevezh mat a hetan deoc'h.

Dor ar bignerez a zigoras war ur pondalez, e leur goloet gant ur veketenn c'hris. Ar pondalez a rae evel un trepas hir, taolennou livet a-skourr ouzh ar mogerioù. D'ar penn all e tifoupas Pierre a zeuas davetañ, gwisket diginkl met direbech, ur mousc'hoarzh ledan war e vuzelloù.

- Charles, n'hallez ket goût pegen laouen on d'ez kwelet ! Kontant on out deuet.

- Met, te oar Pierre, me ivez on laouen en em gavet ganit. Nag a draoù hon eus da gontañ!

- Deus, dre amañ. Deus tre.

Mont a rejomp tre ur pezh bras a-walc'h. Ar saloñs a veze e korn ar ranndi. Prenestri ledan a skoe war ar c'hroazhent ha pelloc'h war ar c'hreiz-kêr. Gouloù ar c'hirri a sklerijenno ar straedoù pevar

estaj izeloc'h. Ouzh ar mogerioù all e oa stalennoù leun a levrioù.

- Ro din da vantell ha da dog. En em laka ez aez.

Charles a sellas ouzh al levrioù en ur deuler pled ouzh hini pe hini, ouzh an taolennoù livet, ouzh an traoù priziüs.

- Eus ar c'haerañ ! Brav-tre eo da gornig. Hoc'h-unan emaoc'h war an estaj-mañ ?

- Ya, ma-unan on.

- Digarez Pierre bout ranell met n'out ket dimezet ?

- Bet e oan... Met deus 'ta e-kichen an oaled. Setu, azez amañ, tost d'an tan. Lâr din petra 'peus c'hoant da evañ.

- Ma, petra a ginnigez ? Ha te, petra a yelo ganit ?

- Me 'm bo ur wiski, ul *Lagavulin*.

- Mat-kenañ ! Memes tra evidon.

Azezet klok en e gador-vrec'h e lezas Charles an traoù da filañ, e zivhar astennet, e gorf distegnet. Pierre en doa digoret un dorig el levraoueg e lec'h e oa kuzhet ar bar. Distreiñ a reas gant div werenn.

- Dal ! Gra un tañva anezhañ : un hini triwec'h vloaz eo ! ... Ha keloù 'peus bet eus ar re all ?

- Ma ! Mui pe vui.

Sevel a reas Charles evit sellet pishoc'h ouzh ur poltred lakaet war barlenn varbr ar siminal. Foto ur plac'h yaouank koant e oa.

- Da wreg ?

- Ma merc'h. Tri bloaz warn-ugent eo. C'hwec'h miz zo bremañ n'em eus ket he gwelet, abaoe ma 'z omp dispartiet ma gwreg ha me.

Azeziñ a reas dirak Charles e-tal an tan. E werennad e chomas da sellet outañ, teñval e benn. Diaes en em gavas Charles, hep rannañ grik, o c'hortoz e talc'hfe gant e gaoz.

- O, digarez Charles ! Yec'hed mat dit ! Met n'az peus ket respontet din diwar-benn hor c'hamaraded kozh.

- Yec'hed mat dit Pierre ! Evit ar re all..., te oar, pep hini diouzh e du, gant e vuhez. N'em eus bet kalz a zarempredoù ganto ha nebeutoc'h c'hoazh bremañ tregont vloaz goude, evel-just... nemet Nicole.

Neuze e arvestas pizh ouzh Pierre evit gwelet penaos ec'h ersavfe dre glevet an anv-se.

- Nicole ? Degas din da soñj, piv oa honnezh ?

- Sur a-walc'h e tlefes bout miret soñj dezhi. Ar goantenn he blev hir du a oa atav ganit, ganeomp e klas termen.

- Gortoz ! Ya, evel-just ! Nicole vihan. Hec'h adwelet ez poa ?

- Ya, ma gwreg eo, eme Charles.

Ma c'hoarie Pierre e leue, e c'hoarie mat. Penaos kompren n'en doa ket mui soñj ken en e zousig bet. Kazi sur e oa e ouie Pierre e oa dimezet ganti. Klask a rae Charles goût petra oa e penn Pierre a oa o valañ soñjoù du, prest da rebech dezhañ bout laeret Nicole digantañ, sur ha n'eo ket marteze. Delc'hel a rae soñj pegen garv e oa bet Pierre d'ar mare-se pa ouias e kolle Nicole.

- Da wreg ! Biskoazh kemend-all ! Met gwir eo e teu soñj din bremañ. Sot-pitilh ganit e oa kouezhet ar fulenn.

Ur mouse'hoarzh trist a dremenas buan war e zremm a zistroas ken buan all er soñjoù teñvaloc'h. Sevel a reas evel e touge an holl mizer eus ar bed ha kemer a reas an div werenn goullo. Mont a reas d'ar bar d'o leuniañ.

- Kont din neuze penaos eo ganit. Mont a ra gant Nicole ? Bugale 'peus ? a c'houlennas Pierre gant ur vouezh diseblant.

Komz a reas Charles eus Nicole, eus e vugale, eus e vuhez neuze ; nemet henn rae hep plijadur, hep joa hag en ur chom a-evezh war doareoù Pierre evit gwelet penaos e teue gantañ. Eñ a oa o kargañ ar gwerennoù, e gein troet war-zu Charles, kropet e zivskoaz, evel dindan ur gargad re bounner. Kompren a rae Charles e oa kriz evitañ deskiñ pe addeskiñ kentoc'h, ha pa vefe tregont vloaz war-lerc'h, e oa aet e vignonez gant e wellañ kamarad. Met, boñ, keit all e oa evelkent !

Paouez a reas da gomz a-greiz-tout. E welet en doa, tremen sur e oa. A-dreuz ar melezour a oa war dornig ar bar en doa gallet gwelet Pierre o lakaat un dra bennak en unan eus ar gwerennadoù wiski. Buan e oa bet graet met gwelet en doa anezhañ o tiskargañ ur sac'hadig e-barzh ar werenn-se. Ur gridienn sklasek a redas a-hed e livenn-gein. Ne c'hall ket bezañ gwir ! «Trubard !» a lâras outañ e-unan, ken spontet ma tivere ar c'hwezh war e dal. Met dont a rae Pierre dija gant ar gwerennadoù a lakaas gant aked war an daolig, etrezo, pep hini e werenn.

- Kontant on ec'h out eürus gant Nicole ha da vugale. Ya, plijet on mar doc'h eürus ho-taou, eme Pierre gant ur vouezh dinerzh ha divegon, en ur dreiñ e wiski en e werenn.

Ne grede ket Charles fiñval ken, strobinellet gant e werennad. Penaos e oa deuet Pierre da varn d'ur marv kriz e gamarad kozh ! Petra zo c'hoarvezet gantañ evit dont da vout ur muntre !

- Setu Charles, un dra bennak am eus da lâret dit. Rankout a rez kompren n'eo ket aes evidon...

- Kompren a ran, Pierre, eme Charles gant ur vouezh izel ha mouk. Hag a-greiz-tout : «un tamm-skorn am befe em wiski ma 'z eus ganit».

- Un tamm-skorn ? Ya, evel-just.

Sevel a reas Pierre ha mont a reas d'ar bar da glask ar podad-skorn. Un eilenn a oa trawalc'h da Charles evit cheñch plas d'ar gwer. Kemer a reas hini Pierre en e zaouarn.

- Setu Charles ar pezh am boa e-sell da lâret dit. Komprenet ez peus n'emaon ket em bleud, emezañ en ur ziskargañ un tamm-skorn e gwerenn Charles. Koazezañ a reas en e gador-vrec'h en ur dennañ un huanadenn. «Ne c'hallez ket goût nag em eus karet anezhi ! Ne zeuan ket a-benn da gompren perak ha penaos em eus hi c'hollet. Bemdez e soñjan enni. E pep lec'h e welan anezhi ha betek en ma c'huzulva mezeg».

Selaou a rae Charles komzoù Pierre hep mont war e gaoz, o tarlipat e wiski. Merzout a reas e vire Pierre e werenn etre e zaouarn hep evañ. Gortoz a rae efed ar boeson kontammet warnañ moarvat. Gortoz a c'hall betek an erc'h du.

- Ne gavan ket mui blaz gant netra, Charles. E foñs an toull emañ, eme Pierre o lakaat e wiski da dreiñ en e werenn. «Laouen on ouzh da welet eürus gant Nicole. Marse ma 'm dije kemeret tro ganti d'ar mare-se?».

Sell'ta, a soñjas Charles, en em zizober eus e gamarad ha kemer ar wreg goude ! Doñjer en doa outañ. En aner e vefe gortoz ec'h evfe Pierre e werennad. Ouzhpenn-se ne ouie ket petra en doa lakaet er werennad wiski. N'eus forzh penaos e c'hellfe kaout dale gant efed al louzoù-se. Skarzhañ a reas e werennad-eñ ha prest e oa da sevel pa bedas Pierre anezhañ chom en e goazez gant ur jestr.

- Mar plij ganit, Charles, un dra bouezus am eus da c'houlenn diganit.

Un dirask a reas d'e gorzailhenn hag e werenn a riñsas. Chom a reas da sellet ouzh e werenn goullo ur mareadig.

- Graet eo ! Echu eo evidon !

Sevel a reas evit pakañ ur golo-lizher a oa war barlenn ar siminal.

- Ma digarez evit an trubuilhoù a ran dit. Pa oan en em gavet ganit dec'h n'em boa ket soñjet er

pezh a ran bremañ. Deuet eo en noz diwezhañ. N'em eus den ebet a fiziañs ken en-dro din. Ha te zo deuet, ma gwellañ mignon bet, tregont vloaz zo goude ma oa aet pep hini ac'hanomp gant e hent. N'eus ket a zegouezh. N'eo ket un taol-chañs, skrivet e oa... Dal, karout a rafen e rofes al lizher-mañ d'am merc'h. Displeget em eus dezhi perak ne c'hallen ket bevañ hag e vefen...

- Petra ? Gortoz ma komprenfen. Met petra eo an istor-se ?

Aet e oa Charles e belbi, en e sav, ur biz tamall war-zu Pierre.

- Ma gwelet 'peus cheñch ar gwer ? Ha petra 'peus lakaet e-barzh ar werenn ? Faot a rae dit ampoezoniñ ac'hanon ! Anzav ! Faot a rae dit kaout Nicole en-dro ! Anzav 'ta ! Hama, c'hwitet 'peus an taol penn-da-benn ! Ha sur ha n'eo ket marteze rak cheñchet em eus tu d'ar gwerennoù. Evet 'peus ma hini, kouilhon ! Lonket 'peus ar poezon, da boezon ! Gwell a-se dit, muntret !

Chom a reas Pierre skodeget, sabatuet, al lizher en e zorn c'hoazh. Kouezhañ a reas er gador-vrec'h trec'het.

- Charles ! Charles, petra 'peus graet ! Nicole ? Met Nicole zo netra evidon, n'anavfen ket anezhi bremañ zoken. Eus ma gwreg e komzen. Karout a ran ma gwreg met n'on ket mui karet ganti. Ar poezon a oa evidon Charles. Faot a rae din, faotet e vije bet din e vije, te, Charles, ma mignon diwezhañ, test eus ma c'holl met, ivez, evit treuzkas ma c'harantez d'am gwreg ha d'am merc'h.

- Faot a ra dit lâret eo me en deus evet ar poezon ?

Ne zibare ket e selloù diwar ar re leun a druez eus Pierre. Ar c'hwezhenn a zivere bremañ diouzh e dal. E zaoulagad dispourbellet gant an euzh hag ar spont, e taoublegas Charles, un dorn war e gof, egile harpet war an daolig. Gant ur ronkell diwezhañ e kouezhas pounner war an tapis, marv-mik.

13601 sin